

Kanaouen an Durzunel

Ton anavezet

Kalz amzer a meuz kollet
O furchal ar c'hoajou
Evid klask an durzunel
Kousket var ar brankou,
Devet a meuz va amors
Ha tennet a meuz fall,
Achetet an durzunel
Ha nijet er c'hoat-all.

Diouz an noz hag ar mintin
E klevan lapoused
O kana, o fredonin
Var vek ar gwe pignet;
Mez n'euz nikun aneze
Hag a bik ma c'halon
Evel mouez eun durzunel
O ouela d'he mignon.

Hirvoudi a ra noz-de
Gant ar boan, ar glac'har,
Evel eun intanvez paour
Kollet ganthi he far.
He mouez a zeu beteg d'in
Hag a zo glac'harus
Ha me da c'houlen ganthi
He foaniou truezus :

— Petra turzunel iaouank
A dourmant da galon ?
— Kollet a meuz emezhi,
Ma fidela mignon.

Ma na zeu eur chaseour
Da ober d'in mervel,
Me varvo gant ar glac'har
Da va mignon fidel.

N'euz na souten na remed
Na konzolasion
Barrek da zond da galmi
Ankeniou ma c'halon.
Trec'het on gant ar glac'har,
Mond a ran da vervel,
Mez na varvin ket kontant
Ma na varvan fidel.

Gwelet a meuz o vervel
An durzunel iaouank,
Dizec'het eo ma c'halon
Gant ar boan, an tourmant,
En he huanad diveza
He deuz c'hoaz lavaret :
« O va gwir mignon fidel ! »
Raktal eo tremenet.

Melezour skler ha brillant
Euz ar fidelite
Te zo ar skuer ar gwirra
Demeuz ar garante.
Nan, na varvin ket kontant,
Nan na varvan fidel !
Birviken na zizonjin
Maro an durzunel.

